

SESSION 2021

**CAPES
CONCOURS EXTERNE
ET CAFEP**

**SECTION : LANGUES RÉGIONALES
BRETON**

COMPOSITION ET TRADUCTION

Durée : 5 heures

L'usage de tout ouvrage de référence, de tout dictionnaire et de tout matériel électronique (y compris la calculatrice) est rigoureusement interdit.

Si vous repérez ce qui vous semble être une erreur d'énoncé, vous devez le signaler très lisiblement sur votre copie, en proposer la correction et poursuivre l'épreuve en conséquence. De même, si cela vous conduit à formuler une ou plusieurs hypothèses, vous devez la (ou les) mentionner explicitement.

NB : Conformément au principe d'anonymat, votre copie ne doit comporter aucun signe distinctif, tel que nom, signature, origine, etc. Si le travail qui vous est demandé consiste notamment en la rédaction d'un projet ou d'une note, vous devrez impérativement vous abstenir de la signer ou de l'identifier.

Tournez la page S.V.P.

A

INFORMATION AUX CANDIDATS

Vous trouverez ci-après les codes nécessaires vous permettant de compléter les rubriques figurant en en-tête de votre copie.

Ces codes doivent être reportés sur chacune des copies que vous remettrez.

▪ **Concours externe du CAPES de l'enseignement public :**

Concours	Section/option	Epreuve	Matière
E B E	0 4 4 1 E	1 0 1	7 4 1 4

▪ **Concours externe du CAFEP/CAPES de l'enseignement privé :**

Concours	Section/option	Epreuve	Matière
E B F	0 4 4 1 E	1 0 1	7 4 1 4

I. Composition en langue bretonne

1. En ur gemer harp war tem ar program « Espace privé – espace public », savit un displegadenn diwar-benn an tri skrid kinniget deoc'h amañ dindan.
2. Grit ouzhpenn un displegadenn diwar-benn an implij eus an dielloù-mañ ewid labourad war an tem-mañ er c'hlass.

Skrid kentañ

Va haerra huñvre

E donder va huñvre
Ez eus eun ti bihan gwenn o pedi,
Puchet e-tal a aot,
Dindan soul koz e doenn
Kurunet a vorvrini.

E donder va huñvre
E chom blaz onest ar zoubenn
O trempa bara zegal
Blaz ar hraoñ, blaz ar fao
Ha blaz ar histin poaz.

E donder va huñvre
Ema c'hwez ar bezin kraz,
Nijet diwar eur holhed,
Ha c'hwez pud ar maged
Evel hini ar horvou o tevi daou-ha-daou.

E donder va huñvre
Emaon noaz,
Dindan moue va bleo dispak,
O tañsal evidout da heul tan an oaled
Ha telenn vraz ar mor o seni ouz an tevenn.

E donder va huñvre
Ema da zaoulagad,
Ha da zivreh digor, ha da galon ive
Hag eur gwele kloz, fichet gant dantelez,
Da lida or harantez.

Naig Rozmor, *Karantez ha karantez*,
Brest, Brud Nevez, 1977, p. 33.

Eil skrid

« D'an deiz a-raok dezhañ loc'hañ un tabut kriz a savas a-nevez etrezomp. Perak e chomis sioul ha habask ar wech-se ? A-barfeted e teuen a-benn da respont dezhañ. A-benn ar fin, aet skuizh-divi gant seurt buhez, atizet gant n'ouzon pe gounnar yen, e rois dezhañ da c'houzout en em rofen d'unan all goude e zisparti. Ar c'homzoù a voe distaget didruez hep morc'hed, hep keuz, hep mezh. Tevel a reas, souezhet gant an neuz nevez a gemere va emzalc'h ha dirak va habaskted. Gwelout a raen en merzherien ; ha koulskoude n'hallen ket herzel. Er c'hontrol, pelloc'h, donoc'h c'hoazh e felle din sankañ ar gontell. Ouzhpennañ a ris, goap war va muzelloù ha krizder em daoulagad, n'en defe nemet ar boan d'ober e zibab e-touez ar merc'hed a rafe dezhañ o lez. Hag o soñjal e kement-se, me, am boa bevet eizh vloaz en e gichen gwerc'h evel da veure va eured, e tinerzhis gant ur c'hoarzh diroll a reas dezhañ sioulaat. E zremm a zeuas da vezañ gwenn evel parch. Tostaat a reas din, ha pezh n'en doa graet morse a c'hoarvezas. Skeiñ a reas warnon gant yender, evel ma vefe bet mennet d'ober din paeañ pep tra c'hoarvezet pe da zont. Ne savas ket ur rebech em daoulagad, nag un difronkadenn em c'horzailhenn. Sellout a raen outañ evel na vije ket bet aze. Pep taol a gouezhe war va c'horf a oa evidon evel un diskoulm d'an orjal am chadenne. Stag e oa va daoulagad ouzh e re. Dieubet en em gaven. Dieubet diouzh ar follentez a bare ennon nebeut ha nebeut abaoe bloavezhioù. Gouzout a raen ez echue neuze pep tra etrezomp hag e oa ur vuhez nevez o teraouiñ evidon. Dieubet e oan dioutañ, ha dieubet diouzhin va-unan. Evel ur vaouez nevez en em gaven, korf hag ene.

Ne harzas da skeiñ nemet pa na oa mui gouest da sevel e vrec'h.

Va lezel a reas astennet a-hed va c'horf war leur ar gambr, ha mont da gousket d'ar c'hazarn.

N'en gwelis mui a-raok e zisparti.

Ar bloñsadorioù hoc'h eus gwelet war va c'horf a oa e zoare da gimidiñ. Pemzek devezh e chomis d'em louzaouiñ. Pa steuzias ar bronduoù lezet gant e veilhoù-dorn war va dremm, e kempennis va malizennoù. Ne raen van ebet ouzh poanioù va c'horf. Ne felle din soursial nemet gant un dra : tec'hout. »

Reun Menez Keldreg, « Elena », *Merc'hed*,
Brest, Al Liamm, 1969, p.58-60.

Trede skrid

« Kej-mej eo bet danevellet ganin betek-henn an darvoudoùigoù em buhez stag ouzh ma revelezh. Nebeut em eus doujet da zibun an amzer. Er pennad-mañ e fell din kontañ ma c'hentañ diskuliadenn wirion, a c'hoarvezas pellik a-raok un toullad mat eus an degouezhennoù degaset ganin uheloc'h er skrid.

Er mareoù-se em boa graet anaoudegezh gant ur plac'h am eus bevet ouzhpenn pemzek vloaz ganti. Gouzout a ran emañ o lakaat mesk e spered al lenner o skrivañ an dra-se. D'ar plac'h-se, eta, 'm boa ranket lavarout, reiñ da gompren bep a dammig pa lârin mat, e oan troet kentoc'h gant ar baotred. Paotred *ha* merc'hed, emezit-c'hwi ! Ket, paotred hag Ur plac'h.

Etre daou soñj on bet chomet e-pad pell a-raok skrivañ diwar he fenn. Diwisk ez on aet d'ar skrid-mañ betek-henn, petra a virfe e vefe taolennet kement elfenn eus ma buhez, danvez enni da zegas sklêrijenn pe sklêrijenn war an divoud a vennan displegañ ? Pa vez bet lamet kement pluskenn a greder a bak an askre, e chom unanig diwezhañ, evit doare, a zamanter muioc'h dezhi.

Hi, zoken, he deus bet ma bountet da lakaat ar pennad-mañ ha na vije bet, panevetañ, tamm poell d'ar milendall-mañ. Anez dispakañ an holl elfennoù betek penn, ez ajen e-bioù ar pal lakaet ganin d'ar skrid-mañ : degas un testeni a-ziabarzh war hentad spered un heñvelreviad. »

Yann Fulub Dupuy, *Par dibar*,
Lannuon, An Alarc'h Embannadurioù, 2006, p. 69-70.

II. Traduction accompagnée d'une réflexion en français

1. Troit an destenn-mañ e brezhoneg.

2. Diwar al labour treiñ-mañ, grit un displegadenn e galleg war ar c'helenn diwezhed : eus peseurt barregezhioù yezh ha kultur e c'heller tennañ gounid ewid tremen eus ur yezh d'eben ?

Troit e brezhoneg

Alors, bien que l'on se trouve au pied de Hong-Kong et non plus sur son pic dominant, il semble de nouveau que la ville et l'île soient sur le point de larguer leurs millénaires assises de granit comme de simples amarres pour suivre dans leur périple sans fin les paquebots somptueux, les cargos massifs et les jonques fabuleuses.

Mais, pour que l'illusion devienne vraiment hallucinante, il faut attendre la nuit. Alors, Hong-Kong, avec tous ses feux multicolores, l'un contre l'autre serrés, et chacun plus éblouissant que le voisin, à forme d'étendards, de fleurs, d'étoiles, de comètes, brûle, comme un brasier aux larges degrés flamboyants, étincelle comme un verger aux fruits de lumière, comme un feu d'artifice inexplicablement cloué au ciel obscur. Et parce que l'illumination la plus vive court sur le front de mer et se répercute dans le flot qui bat les jetées invisibles et que les feux s'étagent le long des pentes de la ville comme ils feraient pour les flancs et les ponts d'un bateau et qu'ils s'espacent avec l'altitude pour ne plus être au sommet que de rares et clignotantes veilleuses exactement pareilles à celles qui luisent à la cime des mâts, Hong-Kong devient, parmi toutes les embarcations lumineuses répandues à l'infini sur la baie, un immense navire nocturne et dont on ne sait plus si on le retrouvera, quand se lèvera le jour, à sa place, pourtant éternelle.

Joseph KESSEL, *Hong-Kong et Macao* [1957], Paris, Gallimard, 2011, p. 35.